

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

68. GWERZ AR PEM COULI

(follennoù 215 - 216)

Me o salud pem kouli
 Gant ar c'hoant bras do c'henori.

Rag vezo skrivet em c'halon
 Jesus ag e oll passion.

O va Salver, me ho suppli
 Dre ho klac'hар kontempli

Ar gouliou deus ho mab ker
 bezit favorabl em c'hever.

Dre verito ar seiz kleze
 Pere a treuzas ho hene.

A ra dezan kalz a boan
 Assistit var va zrementvant

hag evel mo c'heus bet recevet
 e gorf deus ar groas diskennet

Recivit neuze va hene
 a Presantit-han da Zoue.

(Gwerz ar pemp gouli a echu amaň. Ha n'eo ket difazi hon testenn, evel ma c'hellomp gwelout dre geñveriaň ouzh Heuriou brezon nec ha latin an ao. Briz, lec'h m'emaň hor gwerz e-touez an oresonou evit peb occasion.)

Ar peurrest eus ar werz-mañ a seblant din
 bezaň ur c'hemmesk eus gwerzennou a orin disheñvel)

er benedictus mab precius
 ia Mari ar mam zo damantus.

Pa renkim oll e nem eskus
 Da vond dar varn dirag Jesus.

Jesus a varvas da venner
 en eun desert e voa merzer.

- 180 -

a viskas eur gurunen spern
evid on dilivra deus an ivern.

en ivern e man ar poaniou bras
e man an anaont en tan grichas

e punissa neb a torras
Gourhemennou Doue neb er c'hrouas

er barados man ar joaustet
man an torchou koar elumet.

e reï goulou da skoër ar bed.

Pa sono Gabriel e gorn e sonno garo
e ressussito kement zo maro.

Kement zo beo a varvas
Biskoas den dar barados na das
eb poan nag anken vrás.

Miret nag condamm na spontan
Va goad, va skient mirit din
Var ben an eur va° tremenin °kompren : ma
Oreson Mari (ho mam)° °kompren : houma
Kement e goar e goëzet pe hor m:
Kement e goar e lavaret
Kent devo pardon a pouar
enn hini da Rom a zilivro.

VVVVVVVVVV

Jannet Puill 19 janv. 1851

VVVVVVVVVVVV